

HON HUANADO

D'ANN ITRON

ZANTEZ ANNA WENED

War don : Elez euz ar Baradoz.

DA GANAN ENN EUR VONET

Diskân :

Itrôn vad, Zantez Anna, selaouet hon féden.
Deud omp amân d'hô kwélet, a bep tù, a vanden,
Da c'houlén gras ha zikour évid-omp, Bretoned,
Évit Frans hag ann Iliz, buanân ma c'helfet.

Eskop Zantel ker kared, c'houi zô 'penn ar vanden ;
War ho lerc'h 'zo diredet a bep tù beleien ;
Marc'hadour ha skrivanier a léz ho afféro ;
Ar vourc'hijen, ann noblans 'gwita ive ho bro.
Itrôn vad, etc.


Tud euz a bep sort micher'a diléz ho labour,
Gragez ha merc'hed iaouank, 'vit goulén ho sikour ;
Ann dud gwestlet da Zoue 'bedo 'nn ho leandi,
Ar c'hlânvour enn he wélé, ann den koz enn he di.
Itrôn vad, etc.

Kalz a re-all e garje beân gan imp ivé ;
Ha kalon vad ho deveuz, mes nebeud a z anvé ;
Hi a bedo evid-omp kén a vezimp distro ;
C'hui e skuilñ war-n-omp holl dreist muzur ho kensô.
Itrôn vad, etc.

Ar falz doktored war-n-omp marteze a c'hoarzo,
Mes ar pelerin kristen hep ruzia a gerzo ;
Kalz a boan a gemeroft, a-enep d'ho Doue ;
Frans ho devezs diskaret, Breiz 'gleskont koll ivé.
Itrôn vad, etc.

Frans, merc'h hénân ann Iliz, e devo he mennad :
Pi Nao en devo frankiz, pa eo hen hon guir Dad :
Bed omp kiriek d'he boanio ; pedi 'refomp hirie,
Ma toro he chadenno, ma kavo liberte !
Itrôn vad, etc.

Da vesa ann holl deved a zo d'ehan roet,
Na vo nemed eur Pastor, ha ni holl he zened,
Dre ho kras, Zantez Anna, hag ho merc'h ar Werc'hez,
Jezuz a zeui d'hon zikour 'n hon brasân dienez.
Itrôn vad, etc.



DA GANAN PA VER ERRU E KICHEN ZANTEZ ANNA

Sétu ni, Zantez Anna, enn ho touar zantel ;
Hoc'h Iliz-veur a welân, hag hi kaer hag huel,
Ma c'halon deu da domma o vont enn hoc'h Iliz ;
Daero diouz ma daoulagad a ruill evel ar piz.
Itrôn vad, etc.

Dira-z-hoc'h, Zantez Anna, holl amân daoulinet,
A galon e c'houlennomp d'hon Eskop mad iéc'het :
Ma c'hello gant gras Doue hon ren c'hoaz pell amzer ;
He vugale 'deuz ezomm ar c'hras-se, Mamm dener.
Itrôn vad, etc.

War-n-omp holl skuillet ivé hep muzur ho kraso ;
War Frans ha war ann Iliz, ha dre holl war ar vro.
Ma-z-ai karantez Doue ker dôn enn hon c'halon,
Ma virimp holl he lezen, evel-d'hoc'h, hon Itrôn.
Itrôn vad, etc.

Roet iéc'het d'ar re glân, ha d'ar bevien bara,
Kalon frank d'ar pinvidik 'vit donet d'ho maga;
Unanet ann holl vestro, e penn ar paroujo,
Ha leket karantez vraz enn touez ar famillo.


Itrôn vad, etc.

Gret ma vo ar iaouankiz evel-d-hoc'h fur bepret,
Ma sento ouz tad ha mamm, pe Frans a zo kollet.
Hi e devo da stourmi enep ann dud dife :
Mar be fur hon bugale, Frans adsavo arre.

Itrôn vad, etc.

D'ann anaon er purgator goullet freskadurez ;
Bezet mamm ann emzivad, konfort ann intanvez :
Ha goude beân poaniet holl epad hon bué,
Gret ma-z-aimp da ziskuiza da varadoz Doue.

Itrôn vad, etc.



DISTRO A ZANTEZ ANNA WENED

D'ar ger ez eomp bremân, Itron Zantez Anna,
Enn eur veulin hoc'h hanô, ô Mamm euz ar gwella.
Bremân hon euz esperans e teufet da zifenn
Breiz-Izel, hon bro garet, beuet enn hec'h anken.

Itrôn vad, etc.

Mar-d-omp kweet ken izel, ez eo hon fec'hejo
Ho deuz digaset war-n-omp a bep sort gwaleano,
Ar brezel hag ar gernez, klenved ha paourante,
Ann drubuil hag ann anken, deud holl a berz Doue.

Itrôn vad, etc.

Da Zoue holl-galloudek pep tra a zo ezet :
N'en devez nemet laret. ha kerkent ez eo gret ;
Hen oar gand eur c'houézaden didrôna Rouane ;
Hag a ziskenn da netra enebourien ar Fe.

Itrôn vad, etc.

Frans e deoa ankouéet énorî Mab Doue,
Hon Mamm-zantel ann Iliz, he beleien ive ;
Lezet e deuz hep sicour hon Tad muian karet,
Hag ar bleiz 'vid hen tagàn, ar bleiz 'deuz zikouret.
Itrôn vad, etc.

Doue 'vid hon c'hastîàn n'euz hon lezet ive ;
Ha kerkent ez omp kweet : hon gwelet zo true.
Ed omp ken don er vouillen, en dewez a hirie,
Pa dennomp eunn troad er mez, e tounna eguile.
Itrôn vad, etc.

Setu aze ho labour, tud dife, dizoue ;
Frans gwechal pa oa kristen dre holl e c'honée :
Hag hirie ez eo kweet er vaz-keùl diveza :
Eur vro pa ankoé Doue na chom ket enn he za.
Itrôn vad, etc.

Gwel eo breman chanch bué 'vid gortoz divezad ;
Ha pedi Zantez Anna, hon Mamm ken dous, ken mad,
Da gaout true ouz-imp enn hon brasàn poanio :
Pa vezo Doue gand Frans kerkent ec'h adsavô.
Itrôn vad, etc.

Dinerz omp ha dic'halloud, bars e servich Doue :
Red vo c'harpa ac'hanomp, pe ni gwezo arre.
Dre ho sikour ni c'hallo dere'hel euz Doue stâg,
Ha mont d'ar porz a vue, mar sturiet d'imp hon bag.

ERYOAN HERNOT.

Imprimatur

Brioci die 5^a Aprilis 1873.

† AUGUSTINUS.

(Propriété)